





2-4

Oregonian,
tennet ^{By anerka} ans Cantion
an Lad & Horse.

Quaker Binding
5th impression
1677-1720

95177

ORÆSONNOU

DA VEZA LAVARET
DIOUS AR MINTIN,

HA
DIOUS AN NOS,

PA
GLEVER AN OFFEREN,

QUENT HA GOUDE
A COMMUNION,
evel ma desquer er Retrat
hag er Missionnou.



E QVEMPER.
Gant GUALTER BUITINGH, Impalme,
ha Librer eusan Escopry ha d'ar Colle.



* * *
 * * *

AR VENI CREATOR

EVIT IMPLORI GRACOU

AR SPERET SANTEL.

Voar an Ton Latin.



Eut Speret, Croûer d'hon ené,
 Da visita hon volenté,
 Eus à græou Divin carguet,
 Calonnou aep oc'heus croûer.

C'huy so hanver Consolateur,
 An donæson eus hon C'hroûer,
 Feunteun à vuhes, Tan Eternel,
 Hac enction spiriuel.

Seiz donæson à roit yvé,
 C'huy à so bis dehou Doué,
 C'huy so prometter gant an Tar,
 D'hon laquat da goms pep soit mat.

Roit sclerigen d'hon squient yvé,
 Roit d'hon c'halennou caranté,

Crevast dre ho verrusiou,
Morc'horf infirm hac en memproù.

Pellast ar Speret Adversour,
Roit d'omp o peoc'h hac o ficour.
Gret deomp dre o cundu bepret,
En em diual dious pep pec'her.

Gret deomp hanaout Doué an Tat,
Gret deomp hanaout Doué ar Map,
A cridi ferm ezoc'h yvé,
Speret an eil hag eguilé.

Doué an Tat ra vezo meuler,
E Vap yvé, hag é Speret;
Pliget gueneoc'h, ô va JESUS,
Rein deomp o Speret graciús.
Amen.

V. Emitte Spiritum tuum & creabuntur.
R. Et renovabis faciem terræ.

O R E M V S.

DEUS, qui corda fidelium Sancti Spiritus illustratione docuisti: da nobis in eodem Spiritu recta sapere, & de ejus semper consolatione gaudere. Per Christum Dominum nostrum. Amen.



ORÆSOUNOU DA VEZA LAVARET

Dious ar Mintin ha dious ar Nos, quent d
goudé ar Communion, evel ma desques
er Retist hac er Missionnou.

DIOUS AR MINTIN.

Act à Adoration.

Mec'hador ma Doué ma Croüer,
M'oc'hador JESUS ma Salver,
Hirie, hac é queit ma vevin,
Ho servicha humbl à fel dia.

Evis trugarecat Doué.

Me o trugareca, va Autrou,
Eveus oc'h oll madelezon,
D'am beza croüer, conservet,
Preuet, hag en Ilis receiver:
D'am beza bennoaz conservet,
Ha dious pep pirl diotialler.

Act à Offrans da Zont.

Quement à rin, à livirin,
A songin, hag à andurin,
Offri à ran d'ar gloar Doué,
Dreizoc'h Mary Mam à druc.

Ast à Protestation.

Me à protest d'en em viret,
Gant grac Doué dious pep pec'het,
H g observy Lezen Doué
Evit pligeour d'é Vajesté.

Evit ober ur goulen.

O va JESUS, sellir ouzin,
Ha rost din ar pezh à sel din,
Rost din ar grac d'ho care bepret,
Hag ar c'hac n'ech'ho fagion quet.

Oraison d'ar Verc'hes.

Guerc'hes VARY, Mam biniguet,
Voar ma maro ma sicouret:
Guerc'hes VARY, Mam da Zoué,
Ho pet truez oc'h va ené.

Guerc'hes VARY, Mam à drué,
Me recommand deoc'h ma buhé:
Guerc'hes VARY, ô va liron!
Me recommand deoc'h ma c'halon.

Oraison d'an Ell mat.

Ha c'huy El mat cupat Doué,
Miret ma c'hoif ha ma ené,
Ma m'he'ous an drouc-speret,
Ha dreist pep ma dious pep pec'het.

Oraison d'ar Patron.

Ma Phaëren ne veritan quet,
Douguen an hano à zougnet,
Hoguen pa emeus an enor.

Ho pet fourcy eus ho Filler.

Oraison d'an oll Sent.

Me o ped Sent ha Saateset,
Bexit evidoun Advocader,
Ma hillin gant guir caranté,
Finissa errat ma buhé.

Pater, Ave, Credo, Confiteor, Angelus, &c.

Oraison evit elever an Offeren gant devotion.



Resentamb oll guitibunan,
Da Zoué an Offeren-man,
Evit adori an Drinder,
Hac é trugarecat parfet.

Da drugarecat hon Aurreu,
Emeus he oll madelezou,
Hac evit eacut c'ous ato,
Eus é Passion, hac é Varo.

Evit obteni he c'hraçou,
Remission d'hor pec'hedou,
A palamour d'an Anaouñ,
D'ho delivra eus ho phrison.

*Evit Communia Spirituell amant
elever an Offeren.*

Me gatte JESUS, ma Doué,
Retro ho Corf hag oc'h Ené,
Evit laquat doua em c'halon
Ho Maro, hag ho Passion.

8
Hoguen siouas piou ezoun-mé
Da testat euzoc'h, ma Doué,
Biscoas ne veritis netra,
Nemet an tourmanchou bras.
Ra vezo va c'halon rannet,
Rac beza quement offancet,
Un Doué quer bras, un Doué quer mar,
Siouas din-me pec'her ingrat.
Me à protest d'en em viter,
Gant grâc Doué dioua pep pec'her,
Guel eo guenêa mervel mil guech
Evit facha JESUS ur vech.

✠

Pa commencer ur labour bennac.

M Es ofe deoc'h va Doué an action-man
Dre an daouarn MARY o Mam,
Evit pligeout d'o Majesté
Ho senti ons o volonté.

Abars dibri ar Bouet.

Me à ya da dibri evit caout ners da ser-
vicha Doué.

Gonde ar Boer.

Ra vezo metlet an Autrou,
Eus é Boer, hac é oll Vadou,
Eoc'h Doué d'ar re beo,
Ha repos mat d'ar re vato.



Oraison da lavaret quent ar Communion.

Act à Adoration.

M Oc'hador Doué ma C'hrouer,
M'oc'hador JESUS ma Salver,
Oc'hador JESUS ma Salver,
Er Sacrament eus an Auler.

Act à Feiz.

Me gret ferm hep douerans er bet
Ezan da receo en effe,
Ar C'horf sac eus ma Salver,
Er Sacrament eus an Auler.

Act à Intention val.

Me sel din receo ma Salver,
Da renta eor d'am C'hrelier,
Da reara grâcou d'am JESUS,
Evit é vato truezus.

Da gaout digant Doué grâcou,
Da veza trec'h d'am oll vigoù,
Da resista gant Feiz parfer,
D'ar Bet, d'ar C'hic, d'an drouc-speret.

Act à Offrans.

Me ofe da Zoué ma Communion
Evit obienit quir pardon,
Evit gavelc'hi net ma Ené
E Goar JESUS quir Map Doué.
C'hoant ameus da Sacramenti,

Evit ma illin adarin.
 Eguis ma rancan ma Doué.
 Ha contenti é Vajesté.
 Da trugarecat va Aurrou.
 Emeus é oll madelezou.
 Hac evit caour coûa bepret.
 Eus é Bassion biniguet.

Preparation da Sacramenté.

Mé fel din tostiat ous JESUS.
 A receo é Corf precius.
 Evit obteni patiantes.
 Emsiq ar poaniou eus ar bet.
 M'o niquemero va JESUS.
 O Corf ec'h Ené precius.
 Da gaout é poent ma maro.
 Glac har bras eus ma sec'hedou.
 Grit din condia ma buhé.
 Ha mervel en o caranté.
 Da allout gant an oll Alez.
 O caret en en da jemes.

Act à Humilité.

Hoguen allas p'ou exon-mé
 Da tostiat ouzoc'h ma Doué.
 An oll Sent hac ar Sentelet.
 A gren bepret ous o guelet.
 Siouas, siouas, petra riu-mé.
 Leun eo à faotou ma ené.
 Biscoas ne verius netra.

Nemet an tourmanchou brassa.

Act à Esperanç.

Pa goure'hement din JESUS.
 E recevin o Corf precius.
 Ennoc'h sma ma ell fiziang.
 En ho Maro ma esperanç.

Act à Contrition.

A creis ma c'halon mé ameus.
 Ur glac'har, un hirvout, ur c'heus.
 Da veza quemsat offançet.
 Siouas ma Aurrou biniguet.

Act à Garantie.

Patdonnit din ma sec'hedou.
 Dre o caranté va Aurrou.
 Pardonnit à ran en effet.
 Ar re o deus ma offançet.

Ar Pripos mat.

C'hoant bras ameus gant guirionnez.
 Da laquat urz var em buhez.
 Gant gras Doué guella ma illin.
 Pel dious pep pe'het é tec'hin.

Act à Garantie Doué.

Dispañsout à ran an traou oll.
 A so quirec da vont da goll.
 Pel diouffu-mé an traou tenn.
 JESUS à garan netra quen.

An desir da Sacramenti.

O! pebes sec'het ameus-mé.

D'o cahout Feunteun à vuhé,
N'en deus eur C'haro c'hoant quer b'as,
Da redeo d'ar Feunteunioù glas.

Oraison d'an Tat Eternel.

O! Tat Eternel ma C'hrouër,
Digañ ho Map ma Salver:
Allas! ne allan muy gortos,
Roit din JESUS, ha Barados.

Oraison d'ar Verc'hes.

Guerc'hes Vary Mam da JESUS,
Disqueñt ho Map truezus,
Sicourit ma sempladures,
Da vent d'ar guir dour à vuhas.

Oraison d'an Ell mar.

Ell Doué, miret d'am Ené,
Me o pet dre o trugaré:
Quig'it dioufin an Ezrouiant,
Evis na trouble ma squiant.

Oraison d'ar Sant Paëron.

O Sant N. ma Patron quer,
Pedit evidoun ma C'hrouër,
Ma illin d'am silvidiguez,
Dibri ar froñes à vir buhez.

Oraison d'an oll Sent.

M'o supply Sent ha Senteser,
Hac Aler gant gloar curunet,
Da foueñsa d'am pauvrenté,
Offrit da Zoué o santeles.

En on buhé, hag en hon mare,
Meulomp JESUS hac é Hano,
Meulomp JESUS é pep amser,
Er Sacramant eus an Auler.



Goude ar Communion.

Ast à Feiz.

ME à gred ferm dirac Doué,
E zedi ebars en nommé
Ar guir C'horf ac ar guir Ené
Eus à JESUS guir Map Doué.

Ast à Adoration.

M'oc'h ader aman ma Salver,
M'oc'h hené evit ma C'hrouër,
Hirio hac é queit à ma vevin,
Ho servicha humbl à sel din.

Ast à Humilité.

Allas! biscoas ne veritis,
D'o quemeret Roué ar Bedis,
Penoas oc'heus-hu bet priset
D'am bisita leun à bec'het?

Action à C'hras.

Siouas penoas é illin-mé,
Trugarecat o Majesté,
Ne douñ nemet ne pre'her quer,
Leun à pec'het ha pauvrentez.

All à Caranté.

Mé est dreist pep tra va JESUS;
 Ho C'hoif oc'h Eñe précieux,
 Ho volonté hac oc'h enor,
 A so ma c'hloar ha ma tenfor.

All à Offranç.

Mé guinig dec'h, va Doué;
 Hep si ma c'hoif ha ma ené,
 Da servicha hiviziquen
 Ho Majesté da virviquen.

All à Esperanç.

Mé fel din pelloc'h ma Salvera
 Miret parfét é bep amser,
 Cant o sicout o volonté
 Ous o carer bep nos ha dé.

Disposit franc à hanoua-mé;
 Ma Zat, hervé ho volonté,
 Ennot'h eman ma oll fziang,
 Ma oll desir, ma esperanç.

All à Protestation.

Mé à protest à vir galen,
 E challein é pep façon.
 Cant o graçou ar pec'hedou;
 Hac an oll goall occasionou.

Oraison.

O va JESUS, guir Map Doué
 E suppliân o Majesté,
 Sellit euzin dré o trué,

Ha sicourit ma faoutrantez;
 Pardonit din ma sec'hedou;
 Ha d'am ené roit o graçou,
 Evit ma illin aré o moyen
 Sench ma bué hiviziquen.

Ma illin trec'hi constamment;
 Ar C'hic, ar Bet, an Azroüant;
 En ur béva santelamant,
 N'oc'h essançin marvellamant.

Goulen.

Roit dinmé epad ma buhé,
 Feiz, Esperanç, ha Caranté;
 Roit dinmé an oll vertusou;
 A enep an oll pec'hedou.

Ma trec'hin dre humilité;
 Peb orgueil ha superbité,
 Avarisset dre larguenté,
 Lubricité dre chasteté.

Ma dre patienter facheri;
 Dre caranté an avi,
 Dre temperanç ar gloutonni;
 Ha dre diligeanç dieguy.

Eus à brema bete ar maro;
 Meulomp JESUS, hac é Hano;
 Ra vezo meulet é pep amser,
 Er Sacramant eus an Auter.

DIOUS AN NOS.

Evit trugarecat Doué.

M O trugareca va Autrou;
Emeus oc'h oll donzennon;
D'am beza creüet. conservet;
Prenet, hac en Ilis recevet;

D'am beza en nous conservet,
Ha dious pep piril diouallen

Evit goulou argoulou spirituel.
Roit din ma JESUS gult goulou
Da hannaout ma fêchejon.

Examinit o consciang.
Songit va Ené em offaouon,
Ouvrou, cemprou; longesoanous

Act n Contrition.

Cueus ameus da veza effancer,
Ma Doué din da veza caret,
Me à promast d'an em viret
Gant graç Doué dious pep eñhet.

Oraison da Zoué ha d'ar Verç'hes.

O Tat Eternel, va C'hroüer,
Digañt ho Map ma Salver:
Guerc'hes Vary Mam da JESUS,
Discueñsit ho Map truezus.

Recommandation d'an Itron Varm.

Guerc'hes Vary Mam douç atto,
Ma sicut voar ma maro,

Ho pet truez ous ma Ené,
Guerc'hes Vary Mam da Zoué!

Guerc'hes Vary Mam a truez,
Mé recommand deoc'h ma buhez;
Guerc'hes Vary, ô va Itron,
Mé recommand deoc'h va c'halon.

Jesus, Maria, Joseph, Anna, ha Joachim,
S. Miquel ma Almar, ma Patron sellit ouzin
S. Francis, S. Barba, gloriou S. Caurintin,
Bremen ha voar ma maro ô pet truez ouzin
*Pater, Ave, Credo, Confiteor, Gouerc'he-
mennon Doué, re an Ilis, Litanion
ar Verç'hes, an De profundis.*

LITANIOU
AR VERÇ'HES.

Voar ton: *Considerit pis ô Christen.*

O Tat, ô Map ô Speret Glan,
Sellit ouzomp gultibunan
Ho pezet truez ouzomp oll
Ha miret n'en daimp da goll
Santes Mary, Rouanes ar Bet,
C'huy nep ô Croüer oc'heus ganet,
Guerc'hes Santel ar Guerc'heset,
Pidit na vezimp oll collet.

Mam da Christ Pen guir Christenien,
 Mam c'hras Divin da virviquen,
 Mam pur ha net à pep pec'her,
 Pedit na vezimp oll coller.

Mam dous, Mam flam dré estlambras,
 Mam Doué nep or c'hroücas,
 Mam hon Salver dre or c'haret,
 Pedit na vezimp oll coller.

Guerc'hes leun à prudans parfet,
 Guerc'hes dign da veza carer,
 Gas c'hes dign da veza meulet,
 Redit na vezimp oll coller.

Guerc'hes à gallout bras meurbet,
 Guerc'hes dous à cloüar bepret,
 Guerc'hes fidel en pep momet,
 Pedit na vezimp oll coller.

Mellezour à justis parfet,
 Ty à Gouziegues biniguet,
 C'huy so quirec d'hon joausdet,
 Pedit na vezimp oll coller.

Speret Santel divinifer,
 Enoch pep henor so loget,
 Vassel à devotion fieller,
 Pedit na vezimp oll coller.

Rosen Mysterius dre excellans,
 Tour David o Tat dré allians,
 Tour gant Olifant composer,
 Pedit na vezimp oll coller.

Ty facr gant Aour fin édifier,
 Are'h à Allians biniguet,
 Pors an En so digor bepret,
 Pedit na vezimp oll coller.

Verelaouen Steren brillant,
 Remed da nep so impotant,
 Refug d'ar pec'her anqueniet,
 Pedit na vezimp oll coller.


Soulach d'ar ré melconier,
 Sicour d'ar C'hristen affliget,
 En hano Doué n'on dileset quer,
 Ha pedit na vezimp oll coller.

Roüanez Santel eus an Alet,
 Roüanez an oll Patriarchet,
 An Aëstel ha Prophetet,
 Pedit na vezimp oll coller.

Roüanez an Armé biniguet,
 Meizerien ar Confessorer,
 Guerc'hes, Sent ha Santeset,
 Pedit na vezimp oll coller.

Oan Doué er Groas staguet,
 A lam ar Bet eus à pec'her,
 Or pardonnit an oll d'an oll,
 Ha miret n'en daimp da goll.

Oan Doué er Groas staguet,
 A lam ar Bet eus à pec'her,
 Or pardonnit an oll d'an oll, &c.
 Oan Doué &c. ar guezec d'hon.



REGLAMANT EVIT

beva hervé Doué en pep Tieguez.

1. rentin da Doué

Gragou, Caranté à Galon, Benediction à Ené, Mortification à cors hag à speret.

2. d'an Tadou ha Mamou

Caranté, Respet, Obeissans ha sicour.

3. d'ar Bugalé.

Magadurez, Instruction, Exempl mat, ha Correction.

4. d'ar Mastrou ha Mastrezet.

Soumission, Henor, ha Fidelité.

5. d'ar Servicherien

Peamant, Exempl mat, hag Assistans.

6. d'onnessa.

Caranté, Joa eus é var, ha compassion ouran en é affliction.

7. d'hon Conscienc.

Vigilans, Examen, Pureté à galon ac à speret.

8. d'an Anaoun tremenet.

Redennou, Alusenon, Iuniqu, Communionnou, gounit evit Jubilé an Anaoun er Milmourou, ha pea ho Testamanchou.

9. d'ar Bet.

Mépris, Renoucy dezan, ha sangeal en dangerou.

10. d'an dronc Speret.

Resistans, Cassoni, ha Bresel bete ar maro.

11. Ne vezo enduret é Tieguez er bet

Arré na observont Gourc'hemeannou Doué, na touerien, na blasphematerien Doué, na ré impudic, na rederien an dansou, ha nosvesiou, na c'hoarierien ar c'hartou, ha dinsou, na meverien, na ré à ro goal exempl ma na chensont goude beza avertisset.

12. en Ilison.

Beza modest, devot, ha caout attention.

13. en pep Tieguez.

Pep hunan à ray é occupation, ha caout couñ da pidy Doué ha poannia, offri da Zoué é oll aÿionnou bemdé.

14. en pep Compagnunez.

Parlant à Doué gant respect, eus honnessa gant caranté, à nessi é unan gant humilité.

15. bemdé goulou

Pidy Doué assamblez voar an daoul n dious annos ha dious ar mintin, lavaret ur Pater abars fortial ermes dirac ar Crucifi, pe un Imach d'ar Verch'es evit goñlen ar c'hras na gouïso quer er pec'hst en pehiny ezeo coutum da gouïsa allies. ha promitti ober ur pinigea mar deué da couïsa cana, qber

Oraſon ur c'hard'eur da viana, cleuet an
Offeren mar bet é commodiré à lavaret ur
Pater hac un Ave Maria evit obteni ur
maro mar d'ar guenta à varvo eus an Tie-
guez, abas monet da goufque.

16 bep Sixun.

Pratiqua ur mortification bentrac d'ar
Guener pe da Sadorn, en enor d'ar Paſſion
Jeſus, ha d'ar glaç'har ar Verçhes Vary.

17. bep Sul ha Gouel.

Cleuet an Offeren Bret devotamant en é
Ilis Parous, ac yvé ar Sermon, ac ar Gouf-
perou, ar rest eus an amſer lavaret é Roæ-
ra, viſita ar peuvrien clauf, cana Guer-
ſion hon ſalver, ober ur recreation hon-
neſt ſeparet ar Malet diouch ar Merc'het,
na da ſellet outé.

18. bep Mis.

Coffes ha Sacramanti.

19. bep Bloas.

Ober ur Rænet evit ober reveu eus à
Conſia s evit en em prepari er vat d'an E-
ternité heu-us. Amen.



ORÆSON DA GAOVT CVEVS

ha Contrition da veza offancet Doué,
Remet excellent ous ar Maro ſubit.



Uſoc'h ma Doué mé confella,
Hag ous ar Verçhes Varia,
H g ous ar Sent ha Senteſet,
Coffis à ran ma oll peç'het,
Eus an heut ma peç'his quenta,
Bete an heur à bieman,
Cueus ameus da veza offancet,
Ma Doué din da veza caret,
Mé goulén pardon ous Doué,
Ha Remiſſion en han Doué,
C'hoant bras ameus d'en em viſet,
Gant graç Doué dious pep peç'het,
A quement peç'het ameus gret,
R'ha vin gant ma Zat pardonnet;
R'ha vin gant ma Zat pardonnet,
Dré ar Goat precius en deus ſcuiller;
R'ha vezo ſerivet em c'halon
Jeſus, hag é oll Paſſion;
R'ha vezo ſerivet em Ené
Ar Verçhes Sacr Mam da Zoué.



Oraslon devot d'en em offrin da Zoué pep
minun gant ur c'hoant bras da tec'het
diou ar pec'het marvel.

Guerches Biniguet Mam à drué, me
ma bahez, evit ma pligeo gueneoc'h é pre-
santy d'o Map biniguet Jesus ha requeti di-
ganta na offanci bitviquen james é Majesté
marvellamant. O va Mam douç, ha mat-
me promet deoc'h é vé guel guené marvel
cant mill guesch evit commetti ur pec'het
marvel hep quen gant ma gouziegues Va
Ené à offrin entre ho diuvrec'h biniguet evit
é laquat entre an daouïarn ho Map, hag an
Tat Eternel: ô va Itron, leun à garaaté,
hirio hag à het ma buez en o quemeran evit
Man hag Advocades dirac o Map Mam à
m sericard o pezer truez ouch v'sné p'our.
Ha c'huy Autrou Sant Joseph Compagnun
d'ar Ver'hes biniguet, pidit an Itron Va-
ria da requeti ous é Map biniguet ma pli-
geo gantan effaci ma oll pec'hedou gant ur
guir pinigen ha contrition da veza offan-
cet ur Mest'quor bras hamat. O va Jesus,
quemereit va ené entre ho diuvrec'h, ô va
ené reposit entre diuvrec'h va Jesus,



CANTIC SPIRITVEL EVIT
an Anaounsoer Purgator.



N'spirit din, ô va Doué,
Da goms breman gant caranté,
Eus ar poanniou ar Putgator
Evit ho gloar hag oc'h enor.

Considerit pis ô Christen
Ar Purgator à ben da ben;
Euo é velot Enéou,
Tourmantet gant cals à poaniou:
Enéou int é grac Doué,
Ha pere so dign à drué;
Rac ma souffront allas / allas!
Tout manchou cris ha poaniou bras
Ar Justie emeus à Zoué
Ho dalc'h ebais er poaniou-se,
Evit peur bea ar poaniou
A so dléet d'opec'hedou.

Ho poaniou so griez meurbet,
Nos ha deis allas int losquet,
E creis an ran hag ar flammou
A balamour d'o fec'hedou.
N'endus teaut, na speret humen
A ouffé lavaret na compren,

A Livirit-y ha quendalc'hit,
D'é lavaret evel ma rit.

Ur banné goar à goullennont
Da vouga an tan ma lesquont
Ebars en Offeren-man
Ar goat à hel ho diboannaia.

Roit evito an alusen
D'ar beuvrien ha prisonnerien,
Evit acquitta ar poarlou
Meritet dre ho fêchedou.

Ar yun, hac an Indulgeançou
A so remet mat d'o fêchedou,
Grit o gallout hivisiquen,
Evit o lemel à anquen.

Offrit o Communionou
En acquit emeus o dléou,
Bemnos à bemde livirit
Evito an *De profundis*.

Pidit evito pa tremenot
Dre un Ilis, à pa velot
O iudu hac o relegou
Tolet ebars er c'harnellou.

Pa dremenot dre ur Veret,
Livirit evito bepret,
Pe ur *Pater* hac un *Ave*,
Pe *Requiescat in pace*.

Tollit goude-lé, me o pet,
Voar o besiou dour biniguet

Evit soulagi ho feanniou,
A refiesquy ho enéou.

AMEN, ra vezo delivret
Enéou an oll Fideler,
Emeus an Tan, hag ar Flammeu
Ma souffront quement à poanniou.

O va Jesus, va Redemptor,
Tennit é eus ar Purgator,
Logit é dre o tregarez,
Ebars en o Rouantelez. FIN.

EVIT AR GROASIOU A VES DOUGUET
VAR AR MANCHOU.

ME à dougo ma Croas à balamourd'on Salver
Pa sicour ar Christen da soufr é pep amfer,
Evit ar Vué presant dirac ma daou-lagar,
Mé é plaço bepret en tu voar ma dillat.

Pa dui di-me hepp poan, clevet pe affliction
Me à sello eus ma Croas hag à lavaro à c'halon,
Deut mat ra viet Croas Jesus d'am cayet
Me lavaro evel Job, Doué ra vezo meulet.

Me à boco d'am Croas en memor d'am Salver,
En desper d'am natur hervé ma volonté,
En despet d'am natur, ha d'am opinion,
Me à recevo ma Croas eus à creis ma c'halon.

Itron à caranté Glorius Guer'hes Vary,
Lammit eus ma c'halon ar malis hag an annuy,
Muy à drouc d'am nêssa, gret, caret, na clevet,
Muy nemet caranté, douster, ha pariantet.

Mégret en Doué, mé esfer en Doué, mé ados
Doué, mé à gar Doué, mé ameus eueus, ô va
Doué, d'o beza offancer.




Jusqu'à la page 20.
Les antiques sont
dimp. & Mauv. vit.
Le reste n'est pas
de lui, ~~il est~~
très probablement
^{Rec. pp. 13, 14}
Le tout a dû être
imprimé grande
temps après la mort
dimp. & Mauv. vit.

Harduvin, a imprimé
les deux dimp. & Mauv.
vit en 1656. —

Gualter Bui tingh.
était imprimeur
du collège — en
1696 — et peut
— être avoir

P. B. 1. 7

Ben



Gweld

27.10.78

Joachim

Diocèse de
Quimper & Léon
Eskopad Kemper ha Léon

Document numérisé en 2015